



CHANSON NEVEZ

*GRET dre Simon LE COAT, Secretour
 an Autrou Sous-Préfet deus a Montrou-
 les, evit exhorti ar bopl da zioual eus
 an inventerien cogeou faos, hac d'eun
 eur rei d'an urz vad.*

Var ton : Adieu Pontreo, va her natal.

Desiderium peccatorum peribit.

FRANSICHEN, mignonet ar peoc'h
 Ag ar guir dranquillite;
 LOUIS trivac'h, so ganeoc'h,
 Fin zo d'hor halamite.
 Doue hen d'eussan digasset
 Evit ober hor boneur,
 Birviquen na vezimp troublet
 Birviquen n'hor be maleur,



Ar Roue, he houarnamant
 Dr'er brassan activite
 A ra peb-tra, certenamant
 Evit hor prosperite,
 Evit hyahat ar gouliou
 Gret dre hon adversourien
 En amzer ar fallentiou
 Dimeus ar fals-fransichen.



Doue en deveus lavaret
 Beomp chonch hen e gomsou
 M'ho sicouro, n'heur sicouret.
 Divoalomp eus goal-deodou
 Pere a zo en onn touesq
 Torch an tan goal hen ho dorn
 Evit clasq lacat ar guemesq,
 Ar glahar ag ar spouron.



Ar bleï arraget eus ar Franç
 An n'ini e revinas

He scoas eus a beb droug-chanc,
 Eus e goad en eur vagas;
 Chasseet pell eus an Europ,
 Birviquen mui ne zroublo;
 Louis trivac'h zo breman crog,
 Birviquen na ziscrogo.

Ar bopl en antier a bromet
 Marchan evit er souten,
 Louis a vezo quendalhet
 Peb hini a deui d'en difen.
 Ar Republiq ha Bonapart
 Ho d'eus collet ho armou,
 N'on deus mui aon rag ar hanfart
 Dstruget eo he charmou.



Nen deveus mui a armeou,
 Nen deus mui a zoudardet
 Na meïnt nemert en ureou
 Dimeus he gamaradet;
 Pere eb ners, eb esperanc,

Eb sicour hac eb souten,
 A ziscuel eus treust en aparanc
 Queit a n'eus quet eur blouzen.



A chonch oc'heussu, tud va bro,
 Er helaou e peb feçon
 Eus avis even a var dro
 Bed gret var Napoleon :
 A lavaret victorius
 Hen hag e oll armeou
 Ebars he plenennou Fleurus
 Pellec'h voa an brevennou.



Peur-fin he arme voa neuse
 Ene e varvas e bouvoar,
 Quer mad e peas an deis-se
 Oll gouliou ar victoar.
 Ha Franc anezan delivret
 Eurus breman n'eur gavo
 N'espèt d'ar bleizy arraget,
 Rag Doue e zicouro.



Rac-se ta, tud vad, tud honest,
 Distromplet an dud diot
 Pere da gredi a zo prest
 Da guement a ve dibot.
 Leveret de pevar horn Franç
 A zo en dranquillite,
 N'espèt d'ar valiç, d'ar vangeañç
 En hent ar brospèrite.



Chonch on meus er gonscription,
 Chonch er lezen a garnaich,
 Chonch mad er requisition
 En liberte an harnaich.
 Chonch er massacrou so bet gret
 A zirag hon daoulagat;
 Pellec'h man n'hini nan deus bet
 Da neubeuta eur vahat?



Vive Louis hor Roue mad!
 Vive ar famill a Vourbon!

Dr'er berad divea hon goad
 N'ir hendalc'ho var e dron.
 Nin laqfe quentoc'h hon drasta
 Vid donet da bermety,
 Ve gred eneb dezan netra
 Na den all d'hor homandy.



Nan, nan, c'hui tadou ha mamou,
 C'hui breudeur ha c'hoarezet,
 C'hui merc'het ha c'hui priejou,
 Birviquen na bermetfet
 Neb mest en Franc med eur Bourbon,
 E famill mad-oberour,
 Dezi e haparchant an tron,
 Hi ezeo hor guir zicour.



Evidoc'hu pere zo bet
 Tromplet dre an apparanc,
 Ag a viscoas n'oc'h eus caret
 Met zilvidigues ar Franc.
 Deut, distroet eus an erreur

(7)

Da pini evoac'h livret ;
Deut amâ , vefimp vel breudeur
En eun union barfet.



A c'hui , tud fall , tud dangerous ,
C'hui tadou an oll guevier ,
Querzet vell loënet furius ,
Da guzat d'ar c'hoageyer :
E fonç an Azi pe n'Affriq
Querzet-tu pell diouzomp ,
A quesset ganec'hu ho cliq ,
Eurussoc'h en n'eur gaffomp.

F I N .

Vu et permis d'imprimer et de vendre.
Le 22 Février 1816.

*Le Sous-Préfet de Morlaix ,
DE MARTILLAT.*